


Envoyé de M^r l'abbé Le Bras
à son ami M^r l'abbé F. le Goff

Faisons d'abord la chronique
d'une famille que j'habitait
les actes de l'école des corvées, vers
au XIX^e siècle - Les Trévois en
général.

Testament ar Vam goz

slnd I6 pp

envoi de Mr l'abbé Le Bras à son ami
Mr l'abbé F Le Goff
trouvé dans les archives d'une famille
qui habitait (?)
les actes de (?)
au commencement du XIX^e siècle les Trévois
je crois



TESTAMANT AR VAM GOZ,
DEVISET E PEDER G'ENTEL.

QENTA QENTEL.

Deiz mat deoc'h oll, compagnuez,
Pa zoč'h en em gavet assambles;
Pêvar blos antier a so bremen,
Aboe m'o quelis divezan.

Pell so oc'h eus clêvet lavaret
N'en deo negra map en oalet;
O vale hac o pou'men dre ar vro,
E tisquer cais a secrejo.

Guechal pa oan bianic var brec'h va mag'eres,
Mar emeus sonch em boa peder Vestres:
Unan em boa e Guengamp, un all e Landreg'er,
Un all e Brosaos, metch un tabier mezer.

Un all am boa e Gouelou, ur plac'h a gondition;
He zad a voa aotrou, he mam a voa itron,
Hac hi a voa demezel, eac ouspen peñneres,
Mes qent ma is d'he gu let, e voan pedet alies.

An hini a Voengamp am boursuive cruel
Da ober outi pe otramant d'e lezel;
Qercouls e voan poursuivet gant hini Landreg'er.
Bemde e receven a Vrosaos liseriou,
Ha bemde messajer a escopti Gouelou.

Ersin, pa voan en oad demeus a bemzec mi,
E voan importunet ha rentet quer scuis.
Ha me recommand dese donet dar foar da Runan;
Pa o guelzen ho feder ma qemerzen unan.

An hini a Voengamp am abrasse,
An hini a Landreg'er am cherisse,
An hini a Vrosaos a zigasse ganti
A bep sort coanteri evit ma decevi.

An hini dious Gouelou a ouele, a zeploré,
Pa na gaten trei outi, lezel ar re all a goste,
Neuse e voan ientet quer scuis o vale dre ar foar,
Gant ar merc'het ous ma heul eg'is peder anoar.

Ha me sonjal caer e ch abars qemer unan,
Ober un invantion o laqat o feder en unan;
Neuse e voan bianic e qichen va mestres,
Mont a ren ganti en he godel bemdez da blaç al lêz.

Un devez dreist ar re all o vonet da Voengamp,
Aruout ur c'houlapoucet e qichen va mestres coant,
Us fiouter fin demeus a Gerabes,
Adroc'has e godel dious brios va mestres.

Me voa ponneric evidon da veia bian,
Mes al laer a voa dierc'hen hac a redas buan
En tu all d'ar vallis qent ma sellas,
Pa zigoras ar godel, tromplet en em gavas.

Hac én quer buan ba va teulel eno,
Biscoas qement ail a vez n'en devoa var un dro;
M'em boa queus em c'halon dar marc'hat am boa grêt,
O velet ar peder se en ur pez laqêt,
Ha me da foeta bro treze douar Guenet.

Ma voan pêvar blas just ep dont moi d'am bro,
Ha me laqet forestour var forest Coat-Zalmo.
Un nosves dreist at re all en em gavis divezat,
Aruout Guillou ar Bleiz ha va longa pen ha troat.

Ma voan en e gof diou nos ha daou ze,
Epad an anizer ze ec'h aruis em c'hontre;
Gant ur c'hos contel a voa g'enéu e troch'en peziou
A zoul e ziadren evit ma veljen goulou.

Neuze e voan laqêt er g'er da zioual ar zaout,
Em boa peder danvat, ur vioc'h hac ur maout,
Em boa peder bioc'h lêz huc ul loeic bian,
Avizen casset d'o dioual en hent-bras ya-unan.

Ar rugale vunut, eve ma ouzoc'h erfat ;
 Pa ve yen an amzer en em laqa da eoliat ;
 Me voa var an hent bras etreze a Voengamp ;
 Hac aruout g'enen ur certen plac'h yaouanq ,
 Hac hi gonien diouzin da biou e voan tad ,
 E voan ur bug'el yaouanq en devoa fêçon vad.

Mes n'oan qet den adret, den habil ha den fin ;
 Pa e c'hlêvis o parlant e comancis c'hoarsin ;
 Ha me lavaret dezi un dia ne vouien qet ,
 Da g'enta merc'h pe vap o po mar qeret depordet.

Me voapemp blas-anter, prest da vont em c'hoec'hvet ,
 O sellet ous e bisach ha sellet ous e g'enet ,
 Ha me lavaret dezi dre gomzou admirabl ,
 Ma vizen daouzec vlas , evel nen don qet anter ,
 Me reqeise an enor da vez a ho servicher.

Hac hi pa glêvas se, azea em c'hichen ,
 Dre ur guir guriosite da diada va fenn ;
 Hac hi lavaret din ebars e ber gomzou ,
 E renqsen quitat va zaout ha mont ganti d'e bro.

Em c'haseze da ur plac da vez a disqet mat ,
 Guell cals evit na visen gant va mam ha va zad ;
 Ha me viont ganti neuze etreze Poullaouen
 Elêc'h n'em boa conessanç nac anaouideg ous den.

Mes eno e voan conduit ha mag'et distripon ,
 Gant bara brén, souben dour, coc'h qi, qignen, ognon ;
 Pa voen ta mag'et seis blas qer coant'ic en he zi .
 Neuze e voan daouzec vlas poent bras da zemezi ,
 Hac hi da glasq ar person evit dont d'en ober ,
 Me respontas ractal e latin caer ha scler ,
 An eil g'er eus va Fater a so hanvet noster ;
 Evit oc'h ini, person, biscoas na exercis ,
 Evel ne doun qet bet b'scoas en ho catheqis.

Hac én goulen ouzin ha me vise contant

Donet da zemesi brema souden vatant;
Hac e rose din ur plac'h coant da gousqet gane
Pa vise yen ar gôan da doma va goele.

C'houi so ur goël bipi, a gont din cals a dreo,
Demisi un den yaouanq n'ousoc'h a belec'h eo;
Me lar déc'h franchamant na zemezin qet c'hoas,
Qen na vezoz va mam pe va zat var ar plaç.

Ar person pa glêvas da scrifa ul liser,
Ha me qemer pen an hent da vont tresser ar g'er,
Ma teuas ar vrac'h var va lerc'h,
Da goms din evit he merc'h.

Clévit, emezi, den yaouanq,
Retournit, ha ne vezit qet fencant;
Mar querit retorn c'hoas d'am zi,
Me reï moyen d'och accordi.

Ma carac'h retorn c'hoas ur vech,
Me reïo déc'h souben al lês,
Ur beren brein, un aval fall,
Na rofen da hini eus va bugale all.

Penos, emoun-me, ha c'houi so dall,
Gant ho souben, per, aval fall,
Gant ho yot querch grêt gant qig soll,
It, it d'ar gær, main ar burzudou,
Grac'h cos, eru ho fri en ho qinou,
Lavarit d'o merc'h en em gonsoli,
Me ne ran qet a gas anesi.

Ma teuas un ozac'h a fêgon
Da chousout petra voa ar rôson
Penos, emezan, mic'hiec,
Difêçon bras e parlantet
Ous an hini en deus o mag'et
Seis blas antier bars en e zi,
Ha c'hoas contant da zemezi.

It d'ar gær, c'honi, va mignon,
 Da spaza ho caz dindan dastan,
 Na gretac'h qet din lavaret
 Dirac den honest ebet,
 Sec'ha ma fri, en ven mic'hiec.

Mes eus hō fri e man pateren ho mam-gos,
 Hac hi o vrania gant an avel evel ur c'hloc'h,
 Hac én dat gær pa glêvas va c'homsoù,
 Ha me qemer pen an bent da vont treze va bro;
 An nos a aruas ha me da c'houlen lojan
 En ti un otroù bras eus e vreg e-unan.

Pa antreis er pors e voa'n ittron var an treuziou;
 Ha me d'e saludi ebars e ber gomzou,
 Ha me goulen diouti ha me vise lojet,
 E voan un den yaouanq ne vouien pelec'h monet.

Hac hi goulen diouzin piou a rêt ac'hanon,
 A bez quartier e voan ha demeus a be bro;
 Choui zo un den adret, ho fêçon a blij din,
 Qeit m'o po bolonte ec'h allit chom em zi.

Me so mab dà ur Baron demeus a Vreiz-Izel,
 Aroc ur Brinçes vras emeus renget tec'hel,
 Pini a falle dezi va c'haout evit pried,
 Mes n'oa qet d'am grêt hac e meus-i refuset.

An aotrou voa deus crec'h a deuas d'am saludi
 Gant ur galon joaüs hac en ur gousc'hōarsim:
 Antreit, den yaouanq, ba deut da dal an tan,
 Me a meus teir verc'h coant, hac o pezo unan.

Ha me en em gaout neuse terrupl bras morc'reduz,
 O velet voan en em gavet en ur plac qen danjeus;
 Rac an nep o deus c'hoant da viret ho goeic'hdet,
 Arabat è dezo chom etouez ar merc'het.

Qent monet da gousqet e c'houlennis conje
 Da vont ermès ar pors da ober eur bale;

Pa gavis pen an hent ha me comanç da redee,
Ha caout eur marc'h mat pehini a voa dibret.

Pigna' ris var e g'ein ha d'ar galoup d'am bro,
Marc'h Hamon foulz-biscoas na c'has quer brao en dro
P'am boa tremenet Goengamp, aru tal Kærahes.
E rancontris ur vrac'h gos o vont e qær gant lêz.

Hac hi goulen diouzin ha me am boa guelet
Yan Gornec, he goas, o vont aroc gant ur sac'hat ed;
Ha me o respont dezi em boa guelet ur goas
Gant ur zæ lien melén basou zei, bragou bras,
Ha gantan ur plac'hic coant, na cesse da boqat.

Ar vrac'h pa glêvas se foeltra he fodat læs,
Tronça he bros, he invis var pennou he diou les,
Hac hi commanda da redec etreze Montroulez,
Va marc'h a yas ganti, me dar gær var droat compes.

E I L Q E N T E L.

Me a so un dijentil eus a galite vras.
Va oll ditrou so scrifet na gant avalou poas;
Va zat oa ur prinç puissant a enezen Cailot,
Hac a fraillas e oll zent gant patates ha yot.

Va zat ous ma c'haret un deiz a laras din
Qemeret e vates p'am bise c'hoant demezi;
Honnes a voa unan demeus ar barfeta
A oufac'h da gompren birviqen er bed-mâ.

Ha m'o pe paourente, emezan, gant ho pried,
Deus calz a druachou e viot divorc'het;
Nep en deus comenant, douar, feurm ha leve,
A bæ contribution da berceptour e gontre.

Nep a sent ous e dat o deus bonheur peurvuia,
Me eure ar c'hontrel, ma ranqis sortia;
Layaret a xin crenn en ur g'ir franchamant,

Bijen ne razen ze gant va c'honsantamant.

Guell e vise g'enén en ur g'ir quicat ar vro,
 Qent ma rasen ar rol pa ne devoa madou,
 Ha me neuse souden qemer hent bras Paris,
 Biscoas en nep tachen assur ne arrétis;
 Guell e voa stoqet va fén ebars er vezen bellán,
 Ha me chom eno neuse souden da denna va halan.

Pa voan eno eta ur poulsat reposet,
 Ec'h aruas ganén eun ozac'h dilavrec,
 Hac éa goulén diouzin a belêc'h e teuen,
 E ranqe caout va bragou, pe e foeltrje va fén.

Setu me ta contraignet ac'hano da dec'hel,
 Ha me mqnt da ur baros hanyet Cuvelpenpottel;
 Ma chomis eno neuse vardo daou pe dri mis,
 Da zisqi secrejou, micherou e peb g'is.

Me zo eur mestr micherour, mar deus en escopti,
 Evit ober rochedou, boutou coat peseliou, podou pri,
 Ha menuser e mein, ha maçoner e coat.
 Gout prena ha guersa a rân e pep marc'hat.

Afronti ar grag'es, trompla ar varc'hadoures,
 Biscoas diner custum na baeis e nep lec'h,
 Davantach a oun c'hoas, pa ve un amitie
 Amàn eure daou zen e form a garante.

Hennes a so eur secret hac a so difficile,
 Hac evit er gousout e ret beza habil;
 Rac cals a dut a so, pere na ouzont qet
 Fin na commançamant demeus an amouroustet.

Yaouanq's so friant, cosni a so noasus,
 Ma vent daou demeset e vent bepret morc'hedus:
 Va amitie so bras en andret ar merc'het,
 Mes ive an nep a gar a verit beza caret.

Rac-se eta e pedan gant guir humilité
 An ancou d'o lipat ma nam c'heret ave,

Ar finna pobl a voe biscoas er c'hartier,
Setu ame Yannic ar vil vicher
Zo deut evit o quelet gant guir humilite,
Hac er memes amser ar vro hac ar c'hontre.

Me'meus disqet evit va boüet
Ar pe biscoas na voa sonjet,
Da g'enta ezoun qèmener,
Mestr a lestr, ramouer, qere ha qivijer,
Calvez oun hac ive maçon,
Rincer ar privenzou hac ouspen-ze, mitron.

Gant art aritmètiq hac an negromanci,
E ran en un instant eus a zaou ober tri;
Disqi a ran ive secrejou d'ar grag'e
Da laza laou ha c'hoën ebars en ho guele.

Selaouit, merc'het ha grag'e,
Ar reb o deveus laou ha c'hoën en o guele
Me zisqo deoc'h eur secret
D'o laza oll, mar qeret.

Ret e déch' denc'hel ur c'hoanen du,
Laqat en he diouscouarn eur palevans ludu,
Hac he foueta dre ar pel,
Qen na saillo en he rastel.

Neuse e commango da yudal,
Hac e teuyo ar re al da fringal;
Ha dre ma teuint var an dro,
Gant al ludu-se en o dallo.

Neuse ec'h aller o lasa a doillou pistolennou,
Hac ober eus ho bouzellou silzic, goadeg'ennou;
Me voar ober crampoes ha yot gant patatez,
Ha laqat ar merc'het da stotat ep paoues.

Labourat a ran er jardinou,
Ha falc'hat ive dre ar prajou,
Ober un arat gant ar grac'het,

Hac ur c'har a la malbroug gant lostou c'huilet.

Gant treid siliou sorseresou a raon,
Laqat an dour da redec ouc'h an traon;
Davantach ez on diviner,
Bepret e venn caet var ar mæs pe en kær.

Goud a rân ive ober croeyou,
Ober guersidi gant treid saouf pe loeyou,
Butun scaferlati, jigoden gant hilin.
Ha laqat ar merc'het bepret da stotat guïo.

Gori a rân ar forn gant erc'h,
Ha forci ar merc'het da redec var va lerc'h;
Stonfa ar forn gant aman fresq.
Disqi ar grag'ez da vrasesi an esec'h.

Redet emeus tout an departamanchou,
Da zisqi rismadellou ha cals a dalanchou,
Pere so profitapl d'ar grag'ez peurvuia,
Ma qeront o disqi ha laqat o fublia.

Da g'enta ribota ha cresqi gant dour al læs,
Hema so ur secret ha n'en deo qet dies,
Nea va c'huden hac ober va deves,
Dansal hac ebata ha coussiet alies.

Ispicial ar grag'ez hac a fum un nebeut,
Ur secret da viret ober tan hep qeuneud:
Capabl oun da ober tout ar pez a garân,
Ha gouzout cals a secrejou da espern ar bara.

Pa ven biqen e contân
Gousout a oun mui evit na lavarân;
Qement tra a so tout a ran nemet brag'eyer pri,
M'r qerit va c'hredi ha va c'honsideri.

Un aval pa ve meür a ve poent e debri,
Pa oun deut en oat, poent e din demezi:
Rac-se noblanç ha paysantet, goaset ha merc'het,
Ebars em brassa angen m'o ped va sicouret.

Ur vestres coant ameus en he zi o cluchan,
 Zo hir ha ber, ha teo ha moan,
 Hac a fel dei dre fors ma c'havet da briet,
 Nemedi qet d'am grat, na ne gouennan qet.

Gouscoude e deveus fêçon vad,
 En he fri so tri droatad
 En he daoulagat tri raouen,
 Ha peder just en he dent.

Evit he g'enou charmant so terrapl d'creat,
 Nemet betec he diouscouarn ne bad,
 He sellou a so attirant
 Evel ur bern coc'h en ur pôt-cam.

Elec'h na ve hini nemerti
 Ar goanta ê, mar credit din;
 Pa na gomsan outi avichou,
 E ve qeit he musellou
 Evel lost ar c'has var an treujou.

Ar plac'hic-mâ pa ya d'an danç
 A so leun a gонseqanç;
 Qer qare eo hac ur variqen.
 Croug'et e ven qent ma e c'haren.

Compagnunes, mar em c'bredet,
 Me a so bet teir guech demeset;
 Da g'enta em boa ur plac'h yaouanq,
 Hounes na voa na vil na coant.

An eil a voa un intanves,
 Ha na voa nag ês na dies,
 An dréde a voa ur gos grac'h,
 Na ne voa na clàn na yac'h.

Er bla qenta ma temesis,
 E voa meularjes er c'horais;
 An eil bla ma voan demeset,
 E yea ar Pasq bras da Nedelec.

D'ar Rouane e creis an ân,
 E temesis ar vech divesàn
 Da ounes côs ur bla ha cant,
 Ne vea en he fén nemet un dant,
 Hac e sonjen e voa yaouanq,
 Tromplet voa va speret gant he g'enet,
 Monet a rân d'ar gær d'e guelet.

TREDE QENTEL.

SE LAOWIT oll, tud yaouanq,
 Comsou meurbet divertissant
 Evit recrei ho speret,
 Mar bec'h gant nec'h tourmantet.

Un den yaouanq eus a Dreg'er
 En deus laqet an dra-màn var baper,
 An tenor demeus e vue :
 Darn anezo a so g'eyer ive,
 Ha darn all a so guirione.

Bonjour ha joa, va mignonet,
 Pell bras so nemeus o quelet,
 P'o quelis a boa na voa de all,
 Me so ive eur senechal.

Ne greten qet em anavesac'h,
 Gouscoude ezoun map dar vrac'h,
 Me so mestr Pieres an Dourdu,
 A ra brignen gant guinis du.

Va zad so Charles ar C'hornandon,
 A spaz ar c'has dindan daston,
 Va breur a so an otrou Cont,
 C'hoar va mam so va moereb, breur va zad so va yont.

Giles Parafaragaramus ê va hano mat
 Va leshano ê Cocoricocat;

**G'inic a escotti Treg'er ha Leon ,
Credi a rân oun natif eus a baros Croson,**

**Me so un den a gondition ,
Evel pa ven mab da eur baron ,
Qender-gompes da Bip Lichibonic ,
Breur-caér da Lustucru ar Pinvidic.**

**Credit mat ezoun-me un excelant barbier ,
Rac breur-caér oun ive da Yan ar Rasouer ,
Hac en deus querent a gondition ,
Etoues ar saout , an devet , al loeou , ar c'hochon .**

**Lusureg'es ha pep sort dieg'i
A scuis ganti guell e pep ti ,
Jujumel daenbris côtes môtes fariôtes
Rusmali gouloudren farionibinetes ,
Nep a so diarc'hen ne gollint qet o botes.**

**Tud jentil , noblanç ha paysantet ,
Eus a greis va c'halon me ho ped ,
Na vanqit qet , va mignonet , brema ,
Da zont ganeme ha re-all da goania ,
Evit gant plijadur recrei ho speret ,
Pep tra vad ameus a bell so preparet.**

**Grêt emeus rost gant diou guespeden ,
Pêvar gartier azen hag ug'ent qellienen ,
Ne dorot qet ho tent e crignat an esqern ;
Traou delicat ameus gant hast bras clasqet ,
Ha traou lipous estlam , difficile da gavet ,
Treit siliou , discouarn huilet ha coc'h qesec .**

**Ouspén evit an dessert emeus cavet ,
Qerniel c'hoen , ul louarn besq , ur c'hat lostec ;
Ne gafet qet cals a dut fur
A gafe ar remàn dre natur .**

**Ur saladen ameus ive clasqet ,
Deliou linat ha re alec ;**

Nen deus qet a guinegr nag heol gante,
Mes dour beol a so larg'ente.

Compagnunes, va excusit, me ho ped,
Rac evit servicha certen na otson qet;
Qenta qentel am boe biscoas
A voe scrifet gant avalou poas.

Ha na zeszis nemet diou liseren
Adalec va lein bete va meren;
Hac e larent oll din ar scolaerien,
Birviqen ne raien nemet ur vouriqen.

Ar vagabonet-se a voa inoçanté,
E laret an dra na ouient qet;
Gouscoude e voan seis sisun pe eur mis
Abars biscoas netra ma ouis,
Pini a voa anaout pen an asen,
Qender-gompes d'an oll dut scolaerien.

Racse na vesit qet den soueset,
Cals a dut a vez alies tromplet,
Gant eur c'havast hep monet pelloch',
Nen deus netra tout er bed-mào dificiloch'.

Mar gousoc'h ar fêçon, respontit propr,
Ha lavarit pe ben d'ar c'havast a ya aroc;
Serrit ho qinou, pa ho pedân,
Brêmân ar guel studia a ran.

P E D E R V E T Q E N T E L

Ouc'h oach dibales dious Paris,
Lantiguen eol decot ilis diflo
Evit al latin-mâ ve ententet qet,
Selaonit oll e bresonnec,
Hac e clefot e ber gomzou
Publia an ordrenançou.

Un ozac'h cōs a Boullaouen ,
 O vont d'ar foar da Rostrenen ,
 Da anter Ebrel e mis Even ,
 Etre unec heur ha creisde ,
 E c'hanas daou a vugale.

Qenta mab en devoe voa Yan Farioqin ,
 Ur gourmand infam stoter er vassin ,
 Zo bet e Paris o tesqi an nigromanç ,
 A eston an dut sot gant cals a eloqanç .

An eil qent ma voa deut er bet
 Ne voa qet c'hoas ganet ;
 Hanvet voe Yan al Lorennec ar pot fin ,
 A voe grêt Sacrist e bourg Plestin ,
 Ha barner en departamanchoù ,
 Pehini en deus grêt ordrenançou
 Ma rencô an oll merc'het yaouanq ,
 Da lavaret eo , neb a zo friant ha coant ,
 Mont gant ho mignonet d'an arme ,
 Ha da gousqet bennos gante .

Rac-se , merc'het va bro . enim depechit pront
 Ha deut da boqat din pa vezoc'h prest da vont
 Evel amazonet da gaout ho rejmant ,
 Da lipat ho routiq a zo potret vaillant .

Peder pe bemp plac'h a Baris
 A deuas d'en em glêm dre valiç ,
 N'oa qet avoalch evit pepini eur goas ,
 Daou pe dri n'oa qet re , na memes davantach .

Pa ezont dirac ar roué ,
 E leversont ar franc virione :
 Fidel omp , emeze , d'ho lezen ,
 Accordit deomp-ta hor goulen .

Neuse souden voe grêt commandamant
 D'ar merc'het diyallo hag iye d'ar re goant ;

Da vont d'ar gær da zebri o c'hoan pe o zijuhi,
Ma ne falle qet dê passéal gant peb a hini.

Merc'het yaouanq Costes an Nord
Zo qasi peurvuia eon pe dort,
Ha re'n departamanchou all, couls a re Finister,
Zo ordinal soupsonet da gavet boutou ber.

Potret yaouanq va bro, gout a ouzoc'h
Penos merchet Lanneur, Plougaznou, Plouezoc'h
Plégat, Sant-Yan-ar-bis, Plouyan, Plourin, Garlan,
A renco coust pe goust cousquet gant pep a unan.

Hac an esac'h hag ar grag'es
O deus avertissamant ives
Pa viont squis da zisquisa,
Da sench ha da zispartia :
En Otiant, en Henbont hac e Pontivî
En deus chenchet meur a hini.

An dra-se evit esamant ar vio,
Setu eru mis Guengolo,
Erru foar an Trogerezou
Da vouel Maze var mene Brez
E troq an ezac'h hag ar grag'ez,
Nep a so squis gant e bar,
Laqit al licou en e fen, hac it ganti d'ar foar.

Tud jentil, noblanç ha paysantet,
A greis va c'halon me ho ped,
Mar ben qer frajil d'oc'h offansi
Gant ur goms drouc-lavaret, m'o ped d'am excusi.
N'en doua qer un den en dese studiet,
Hac a velse a bell an traou a so cuset.

Bian ê va speret, bian va heritach,
Testamant ya mam gos a vo va oll bartach,
Hounes a laras din dre gomsou excelant,
D'ar c'houls ma voa hi cos me a voa den yaouanq.

Va mab, na laqit qet, mar qeret,

Ho stil e peb lêc'h da re garet :
Dalc'h va mir g'enet da yalc'h ;
Ar bleis ma ve demezet a zeufe don aoualch'.

Benos Doue d'an diner
Ara e hostis e pep qær,
Gallec ha brezonec a oar,
Hac ober e hostis e pep foar :
An amzer a ra an bat,
Hac an arc'hant a ra ar marc'hat.

Setu amàn Testament va mam gôs ,
Pini a dieit lenn hac en deis hac en nos ,
Avoa scrifet pemzec de qent ma clàvras ,
Ha dictet tri dez goude ma vaivas ,
Testament caér , scrifet gant plous ,
Aso bet alaouret gant daoulagat picous .

Composet gant Ustach Toraval ,
Hac e gonsort Jeromic Kikikokokaraval ,
E gamarat Yan ar Maout , goroer ar zaout ,
Hac e g'ender Yan ar Zaout , a so mal e gaout .

Ne p a fel dezàn cavout an Testament ,
Arenq eta donet promptamant
Da Vontroulez da di LEDAN , Imprimer ,
Ag'ever en e di pa ve chomet er gær .

F I N.

